




KENVREURIEZ AR BREZONEG

43

Overennou ar Zent, ar Zenteged

43

(40, 41, 42, 43, 44)

1) Fanch d'an Aotrou Person.

2) Overenn ar verzerien (An Aviel) p. 96

3) *Rummad ar Bastored (Ar pedennou)*p.101

4) Al lennadennou kenta evid ar Pastoredp.119

Evid kement-tra a zell ouz "Kenvreunier ar Brezoneg" (Koum. 25 lur)
her goulenñ digand: An Ao. Job SEITE, Skol an Aod 29249 GUISSENY

CCP 1738-66 Rennes.

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

1°) "Levr. Overenn"	gand eur golo ler drevezet	50 lur
	plastik	36 lur
	paper kalet	32 lur
	+ mizou kas.	

2°) "Komz Doue en Overenn" Levr T 30 Lir

3°) "Komz Doue en Overenn" Levr A, B, C... pebhini 20 lur:

4°) "Ar Briedelez" ... 8 zur

5°) "An Nouenn"... 8 zur

6°) "Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon"...35 lur

7°) "Kroaziou Keltieg" (Bleun Brug).... 3 lur

8°) "Overennou evid an Anaon".... 8 lur

9°) "Overennou en enor d'ar Werhez"... 8 lur

10°) Sakrament ar vadižiant"...8 tur

Troidigeziou aotreet da arnod evid an eskobti a-berz an Ao. F. BARBU, eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 15 a viz du 1976
Visant FAVE, eskob skoazeller.

Aotrou Person,

C'hwi a lavar: "n'heller ket displega skêr an traou e brezoneg."

Re wir eo, ne vez ket êz atao. Ar brezoneg evel ma vez komzet bremañ a zo eur yez poblek ha n'eo ket eet war a-raog evid astenn an nver a heriou implijet o veza ma n'eo ket bet kelennet er skolioù nag o veza n'eus ket bet embannet kalz levrioù pe gazetennou o tisplega ar menozioù nevez dre ma teuent e-touez an dud. Ha c'hoaz an nebeudig a draou bet embannet n'int ket bet lennet nemed gant hiniennou Petra eo mil pe zaou vil koumananter-ne lavaran ket lenner d'eur gelaouenn uhelloc'h !

Ouspenn war dreutaad eo eet or brezoneg; eur bern gerioù, anavezet gwechall, ne vezont mui implijet. Hag an dra-mañ a zo gwir n'eo ket hebken evid skianchoù ar bed med ivez evid ar skianchoù sakr, evid an doare da zisplega ar feiz. N'eus ket keit-se a zo- em yaouankiz-e veze desket eun tamm brezoneg uhelloc'h war ar poent-se gant lenn ar hitekiz, ar hantikou, buez ar zent, kannad ar Galon-Zakr, lizeri Breuriez ar Feiz, Feiz ha Breiz hag ivez gant selaou ar zarmonou. Anaoud a ran tud hag a oa gouest, eur wech deuet d'ar gêr euz an overenn, da zisplega, ger-ha-ger pe dost, zarmon an Aotrou Person. Eur bern gerioù ha troioù-lavar a veze a veze evelse sanaillet er spêred heb ma vefent a implijet er vuez pemdezieg. Ha c'hoaz heni pe heni en em zile tamm ha tamm, dre douez, er marvailloù. Bez 'e oa evelse eun doare brezoneg "nobl" hag a veze intentet e peb leh, e Kerne, Leon ha Treger.

Siwaz eet eo ar mammennou-se a vrezoneg demlennegele da hesk! Ne vez ket embannet a vrezoneg pa ne gaver ket a werz d'ar heñtaouennou, ne vez ket lennet a vrezoneg dre ziouer a skridoù. Aze emañ an dalh.

A hend all ar yez a gomze Jezuz d'an dud, yez ar bobl, nebeud diorroet a oa dem-henvel war ar poent-se ouz ar brezoneg hag ar Helou-Mad a zo bet hadet. Or beleien koz o deus hentchet tud o amzer war hent ar zantelezh gant ar brezoneg. Menozioù nevez a zo da zisplega en o amzer a vremañ. Dre barabolennou, Jezuz e-neus displeget menozioù uhel. Petra eo or hrenn-lavarioù nemed parabolennou berr.

An arhant a zo eur mestr fall
med eur zervicher mad.

Gwell eo deski mabig bian
eged dastum madou dezêr.

Gwell eo karantez leiz an dorn
eged arhant leiz ar forn.

Ar penn-ed skañva
a zav sonn an uhella.

Ha ped ha ped euz or hantikou a zo enno pozioù talvoudus hag a gan er sperejoù hag a ya don er halonoù hag er vuez.

Evid beva gant levenez
n'eus ket ezomm aour na perlez.

N'ho peus taolet kont, Aotrou Person, gant pegement a evez e vezit selaouet pa zeu ganeoh komzoù evelse hag a var an oll dindan eñvor hag a zougen frouez kredit ahanon... Añzav a rankan, koulskoude, n'eo ket êz ho labour !

Gand va brasa doujañs.

Fanch.

OVERENNOU EVID AR ZENT HAG AR ZENTEZED.OVERENN AR VERZERIEN:AN AVIEL.1-MAZE 10/17-22

Alleluia Alleluia.

Eüruz ar re o-deus da houzanv ablamour da zervij Doue, rag dezo eo rouantelez an neñvou...Alleluia.

Kaset e vezoh dirag al lezvarn, ho skoujeza a raint en o zinagogou.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE:

17 Diwallit ouz an tud !

Ho kas a raint dirag al lezvarn,
ho skourjeza a raint en o zinagogou !

18 Kaset e vezoh dirag ar gouarnour hag ar rouaned
ablamour din;
eun testeni e vo kement-se evito hag evid ar bayaned.

19-Pa vezoh evelse laket etre o daouarn
na vezit ket enkrezet gand gouzoud petra ha penaoz respont;
ar pezh ho-peus da lavared a vo roet deoh da houzoud d'ar mare-se.

20 Ha n'eo ket c'hwi eo a gomzo
med Spered ho Tad a gomzo ennoh.

21 Ar breur a werzo e vreur d'ar maro
hag an tad e grouadur;
ar vugale a zavo eneb o herent
hag o lako taoler d'ar maro.

22 An oll o-do kas ouzoh ablamour d'am ano
med an hini a zalho mad beteg ar fin
hennez a vo saveteet.

2-MAZE 10/26-33:

Alleluia Alleluia....

Eüruz an neb a zalh mad e-kreiz an drubuill;
rag goude beza bet evelse klasket
e resevo ar gurunenn a vuez ...Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE:

26 Jezuz a lavare d'e ziskibien;

-N'ho pezet ket aon rag an dud;

n'eus netra kuzet, ha ne zeufe ket da veza anavezet
netra en deñvalijenn ha na zeufe ket er sklerijenn,

27 Ar pezh a lavaran deoh en deñvalijenn, henn lavarit er sklerijenn,
hag ar pezh a lavaran deoh e pleg o skouarn
henn embannit diwar an toennou.

28 N'ho pezet ket aon rag ar re a laz ar horvou
ha n'hellont ket laza an ene;
ho pet aon kentoh rag an hini a hell kas da goll
ar horv koulz hag an ene.

29 Daoust ha ne vez ket kavet daou labousig evid eur gwennege ?
Ha koulskoude, hini ebed anezo ne gouez war an douar heb aotre ho Tad.

30-Ha c'hwi, kement blevenn a zo war ho penn a zo kontet oll.

31 Bezit eta dienkreiz, talvezoud a rit c'hwi muioh eged oll laboused
ar bed.

32 An hini a zisklerio dirag an dud beza a du ganin
me d'am zro a zisklerio dirag va zad beza a du gantañ.

33 Med kement hini am naho dirag an dud, me ivez hen naho dirag va Zad
a zo en Neñv.

3-MAZE 10/ 34-42:

Alleluia Alleluia...

Eüruz ar re o-deus da houzañv

ablamour da zervij Doue

Rag, dezo eo rouantelezh an neñvou...Alleluia.

N'on ket deuet da zigas ar peoh, med ar hleze.

AVIEL JEZUZ KRIST-HERVEZ SANT VAZE:

34 N'it ket da gredi, e vefen deuet
da zigas ar peoh war an douar
n'on ket deuet da zigas ar peoh med ar hleze !

35 Deuet on da lakaad ar mab da zevel eneb d'e dad,
ar verh eneb d'he mamm
ar verh kaer eneb d'he mamm gaer,

36 hag enebourien peb hini a vo tud e di

37 An neb a gar e dad pe e vamm muioh egedon, n'eo ket din ahanon.
An neb a gar e vab pe e verh muioh egedon, n'eo ket din ahanon.

38 An neb ne zamm ket e groaz evid d'ad d'ad d'ad n'eo ket din ahanon.

39 An neb a fell dezañ savetei e vuez a gollo anezi.

40 An neb a ro digemer deoh a ro digemer din va unan
hag an neb a ro digemer din a ro digemer d'an hini e-neus va digaset;

41 An neb a ro digemer d'eur profed, egiz profed, e-no digoll eur profed
an neb a zigemer eun den just, egiz den just, e-no digoll eun den just

42 An neb a roio da eva, pa ne ve nemed eur wrennad dour fresk
da unan eur ar re vian-mañ, ablamour ma'z eo diskibl din
ne jomo ket heb beza digollet.

4-LUKAZ 9/ 23-26:

Alleluia Alleluia...

Ma vezit dismeganset ablamour da ano an Aotrou Krist
Eûruz oh-c'hwi, rag warnoh ema ar Spered a hloar
Spered Doue... Alleluia

An neb a fell dezañ kerzed war va roudou
dezañ trei kein dezañ e-unan.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ:

23-En amzer-se Jezuz a lavare d'an dud:

"An neb a fell dezañ kerzed war va roudou,
dezañ, trei kein dezañ e-unan,
douden e groaz bemdez ha dond d'an heul.

24 Rag an neb a fell dezañ savetei e vuez, he hollo;
med an neb a gollo e vuez ablamour din
a zaveteio anezi.

25 Da betra e talvez d'an den gounid ar bed a bez
ma teu dezañ en em goll
pe ober gaou outañ e-unan

26 Rag an neb e-no bet mez ahanon hag euz va homzou
hennez, e-no Mab an den mez anezañ
pa zeuio en e hloar
hag e gloar an Tad hag an êlez.

5-YANN 12/24-26:

Alleluia Alleluia...

Eûruz an neb a zalh mad e kreiz an drubuill
rag goude beza bet evelse klasket
e resevo ar gurunenn a vuez. Alleluia...
Ar hreunenn winiz taolet en douar, ma varv
a zoug frouez eleiz.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

24 E gwirionez, eme Jezuz d'e ziskibien, m'henn lavar deoh
ar hreunenn winiz taolet en douar
ma ne varv ket, ne zoug netra;
ma varv, avad, e tougo frouez eleiz.

25 An neb en em gar, a en em gollo
an neb e-neus kas outañ e-unan ar bed mañ
a en em viro evid ar vuez peurbaduz.

26 An neb a zo servicher din, ra zeuio d'an heul
hag el leh ma vin-me, e vo va zervicher ive;
kement hini a vo servicher din
a vo roet enor dezañ gand va zad.

6-YANN 15/ 18-21

Alleluia Alleluia...
 Ni ho meul, o Doue,
 Ni a ziskleir ez oh an Aotrou
 Arme skeduz ar verzerien a gan meuleudi deoh. Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

18 M'e-neus ar bed kasoni ouzouh, eme Jezuz,
 c'hwi a ouezo e-neus ket kasoni ouzin-me da genta.

19 Ma vefeh bet euz ar bed
 ar bed e-nefe karantez ouz ar pezh a vefe dezañ
 med n'oh ket euz ar bed;
 me eo am-eus ho tispartiet diour ar bed
 ha setu perag e-neus ar bed kasoni ouzoh.

20 Bezit soñj euz ar pezh am-eus lavaret deoh:
 "ar zervicher n'eo ket brasoh eged e vestr
 m'o-deus gwallgaset ahanon
 c'hwi ivez a vo gwallgaset ganto.

7-YANN 17/ 14b -19:

Alleluia Alleluia...
 Evito, en em ouestlan deoh
 evid ma vint d'o dro gouestlet deoh
 er wirionez...Alleluia.

Ar bed e-neus kemeret kas outo.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN:

Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad
 e-neus Jezuz pedet evel henn evid e ziskibien:

11- Tad Santel; mirit dre hoh ano-c'hwi ar re-mañ ho-peus roet din
 evid ma vezint unan, evel ma'z om-ni.

12- Keid ha m'on bet ganto, me eo a vire dre hoh ano
 ar re ho-peus roet din;
 o diwallet am-eus, ha n'eus eet nikun anezo da goll
 nemed paotr e zaonedigez, evid ma teufe da wir ar Skritur.

13 Med bremañ emaon o tond davedoh,
 ha kement-mañ a lavaran p'emaon c'hoaz er bed
 evid m'o devo enno va levenez leun, ha leun-barr.

14- Grêt am eus dezo an donezon euz ho komz
 hag ar bed e-neus kemeret kas outo,
 ablamour ma n'int ket euz ar bed,
 evel me kenneubeud n'on ket euz ar bed.

15-N'eo ket o zenna euz ar bed a houlennan diganeoh
med o diwall a-eneb an droug.

16-N'int ket euz ar bed evel me kennebeud n'on ket euz ar bed.

17-Grit ma vint gouestlet deoh dre ar wirionez;
gwirionez eo ho komz-c'hwil.

18-Evel m'ho-peus kaset ahanon da zond er bed,
me, d'am zro, am-eus o haset er bed.

19-Hag evito en em ouestlan deoh,
evid ma vint d'o-zro gouestlet deoh e gwirionez.

11-RUMMAD AR BASTORED.14-"ELEGIT EUM DOMINUS;"En enor d'eur Pab pe d'eun Eskob;KAN D'AN DIGOR:

Dibabet e-neus an Aotrou Doue Sant A. da veza e velegr meur;
hag o tigeri evitañ e deñzore e-neus greet dezañ kaoud puill an oll vadou.

PEDENN D'AN DIGOR:Evid eur Pab

Aotrou Doue, oll-halloudeg ha peurbadel,
C'hwi hag a zo falvezet-ganeoh
e teufe Sant A. da ren war ho pobl a-bez
ha d'e zervicha dre e gomzou ha dre skouer e vuez:
Diwallit, war e bedenn pastored hoh Iliz
hag an deñved fiziet enno,
ha renit anezo war hent ar zilvidigez peurbaduz.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
a-oll-b iskoaz da virviken. AMEN

Evid eun Eskob:

Aotrou Doue, C'hwi hag a zo plijet ganeoh
e vefe Sant A. eur pastor mad en hoh Iliz;
Grit deom, ni ho ped, dre nerz e bedennou
kaoud lod en ho Rouantelez peurbaduz
Dre or Zalver Jezuz Krist...

WAR AR PROVOU:

En eur lida, Aotrou Doue, ar vemor euz ar Zent
e kinnigom deoh ar zakrifiz-mañ a veuleudi;
ennañ eo e lakom or fiziañs;
Ra zeuio d'on dilivra euz an droug
en om amzer hag en amzer da zond.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

ANTIVONENN D'AR GOMUNION(Yann 10/11)

Ar pastor mad a ro e vuez evid e zeñved.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue, ra zeuy ar gomunion on-eus resevet
da lakaad da greski ennom tan ar garantez
a verve e kalon Sant A.
pa laboure heb paouez evid gloar hoh Iliz
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

15-"STATUIT..."En enor d'eur Pab pe d'eun Eskob.(II)KAN D'AN DIGOR:(Sir.45/30)

Divizet e-neus an Aotrou gand Sant A.
 eun emgleo a beoh.
 ha lakeet e-neus anezañ e penn e bobl.
 Dezañ da gaoud da viken karg enoruz ar velegiaj.

PEDENN D'AN DIGOR:Evid eur Pab:

Aotrou Doue, C'hwi hag ho-peus laket Sant A.
 da bastor war an Iliz a-bez
 ha greeñ dezañ beza eur sklerijenn lugernuz
 dre e nerz-kalon hag e zeskadurez;
 Ni hag a rent enor da veritou eur seurt Pab
 roit deom ar hras da skedi dirag an dud dre on oberou mad
 ha da vaga dirazoh eur garantez birvidig.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a-oll-viskoaz da virviken.AMEN

Evid eun Eskob.

Aotrou Doue oll-halloudeg, grit deom, ni ho ped
 lida ervad gouel an Eskob santel Sant A.
 Hag, evel m'eo plijet ganeoh e teufe
 dre e gomzou ha dre skouer e vuez
 war zikour an dud e-noa karg anezo;
 Evel-se ivez, grit ma vo talvouduz evidom
 ar frouez dirazoh euz e bedennou.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver...

WAR AR PROVOU:

Grit, ni ho ped, Aotrou Doue, da geñver gouel Sant A.
 ma vo frouezuz evidom ar brovadenn-mañ
 kinniget e sakrifikis.
 Roet ho-peus dezi ar galloud da bardoni ar pehejou
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

ANTIVONENN D'AR GOMUNION(Yann21/7)

Aotrou, c'hwi a oar peb tra: c'hwi a oar ho karan.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue, ra zeuio galloud an overenn-mañ
 da daoler frouez puill en on ene
 da deiz ma lidom gouel Sant A.
 Ra zeuio deom drezi sikour evid or buez er bed-mañ
 hag er bed all al levenez n'eus fin ebed dezi.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

16- "VISITABO OVES MEAS"En enor d'eun Eskob.KAN D'AN DIGOR: (Ez 34/11; 23-24)

Intent a rin ouz da deñved, eme an Aotrou
 Rei a rin dezho, va-unan, eur mesaër da veilla warno
 ha me, an Aotrou, a vezo o Doue.

PEDENN D'AN DIGOR:

Doue oll-halloudeg ha peurbadel
 Roet ho-peus d'an eskob santel A. ar garg da ren ho pobl;
 Peogwir e ped evidom
 roit deom gand largentez ho karantez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken . AMEN

WAR AR PROVOU:

Taolit eur zell a vadelez, Aotrou, war ar provadennou
 a lakom war an aoter, da geñver gouel sant A.
 en eur zigas deom ar pardon,
 ma zervichint ivez d'ho kloar
 Dre Jezuz Krist, or Zalver . AMEN

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Yann 15/16)

N'eo ket c'hwi ho-peus choazet ahanon
 Me eo am-eus ho choazet-c'hwi ha roet karg deoh
 da vond euz va ferz ha da zougen frouez, frouez paduz.

GOUDE AR GOMUNION:

Renevezet bremañ dre ar zakramant
 izel a galon, ni ho ped, Aotrou:
 Grit ma hellim, diwar skouer Sant A.
 diskleriz ar pezh e-neus kredet
 ha lakaad en or buez ar pezh e-neus kelennet
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

17- "SUSCITABO MIHI;"EN Enor d'eun eskob.KAN D'AN DIGOR: (I Sam 2/35)

Evelhenn e komz an Aotrou:

"Lakaad a rin da zevel evidon eur beleg fidel,
hag a raio diouz va halon ha diouz va spered."

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue; fellet eo ganeoh e vefe Sant A.
entanet gand ar garantez ha douget gand eur feiz dipar
treh d'ar bed.
Peogwir ho-peus e lakeet e renk ar bastored santel
grit deom, gand sikour e bedennoù,
chom atao stard er feiz hag er garantez
evid kaoud perz, eun deiz, en e hloar.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN

WAR AR PROVOU:

Digemerit, Aotrou, ar provou-mañ a ginnig deoh ho pobl,
da geñver gouel Sant A.
Ma teuio deom drezo, digand ho madelez
ar skoazell emaom o hortoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

ANTIVONENN D'AR GOMUNION; (Yann 10/ 10)

"Me 'zo deuet evid m'o-dezo ar vuez
ha m'o-dezo eur vuez birvidig"
eme an Aotrou.

GOUDE AR GOMUNION:

Bremañ, p'on-eus resevet korv ha gwad ho Mab
e teuom, Aotrou on Doue d'hoh aspedi;
Grit deom, dasprenet da viken, kaoud a benn ar fin
ar pezh a lidom gand eur galon entanet en overenn-mañ
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

18-"SPIRITUS DOMINI"En enor da Bastorêd.KAN D'AN DIGOR: (Luk 4/18)

Spered Doue a zo warnon, ablamour m'e-neus sakret ahanon;
 Kaset on gantañ evid prezeg ar helou mad.
 d'ar beorien, tenna a boan an dud gwasket."

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, sklerijenn an dud fidel ha pastor an eneou,
 C'hwi hag ho-peus laket Sant A. da eskob an Iliz
 evid beza pastor ho teñved
 hag o diorren diwar skouer e vuez;
 Grit deom, war e bedenn,
 mired ar feiz e-neus kelennet dre e gomzou
 hag heulia an hent e-neus diskouezet deom dre e vuez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue bep ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN

WAR AR PROVOU:

Doue braz meurbed, ho pedi a reom a galon izel;
 Evel ma teu ar provou kinniget en enor d'ar zent
 da ziskleria ar hloar euz ho kalloud a Zoue
 Grit ma teuo diwarno evidom ar zilvidigez.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Maze, 28/20)

Setu amañ ganeoh 'hed an oll deizioù
 beteg fin ar bed.

GOUDE AR GOMUNION:

Ar perz on-eus kemeret en ho misteriou, Aotrou,
 ra zeuio d'or ren d'an levenez peurbaduz
 bet meriet gand Sant A.
 diwar ho servicha leal.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

pe:

Aotrou Doue, or maget ho-peus ouz ho taol zantel;
 Grit deom bale war roudoù Sant A.
 aketuz d'ho servicha bepred a galon,
 en eur e zelher dalhmad da gared an oll.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

19-" DABO VOBIS"En enor da veur a bastor.KAN D'AN DIGOR: (Jer 3/15)

Evelhenn e komz an Aotrou Doue:

" Rei a rin deoh pastored hervez va halon
hag a reno ahanoh gand gouiziegez ha furnez."

pe: 'Dan. 3/84 ha 87)

Beleien an Aotrou Doue, meulit an Aotrou Doue,
Sent ha tud izel a galon, meulit Doue.PEDENN D'AN DIGOR:Aotrou Doue, evid ma vefe ar zent (eskibien) A.hag A.
pastored ho pobl,
ho-peus roet dezo brokuz ar spered a garantez hag a wirionez;
Pa lidom hirio o gouel,
grit deom mond bemdez war wellaad o tispenn o roudou
ha beza skoazellet gand sikour o fedennou.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeog hag gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.WAR AR PROVOU:Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue,
Digemer ar zakrifis-mañ a-berz ho pobl,
kinniget en enor d'ar zent A. hag A. hag evid ho kloar
Grit ma talvezo deom da zilvidigez peurbaduz
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Maze 20/28)Mab an Den n'eo ket deuet evid beza servichet
med evid servicha ha rei e vuez evid an dud.GOUDE AR GOMUNION:Resevet on-eus ho skramant, Aotrou,
o lida gouel ar zent A. hag A.
Grit ma teulo deom, diwar ar pezh a lidom er bed-mañ,
an eürusted peurbaduz
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

20- "SACERDOTES TUI"

En enor da veur a bastor.

KAN D'AN DIGOR: (Salm 131/9)

Ho peleien , ra vo santelez d'o gwiska,
Ra drido gand levenez kalon ho tud fidel.

PEDENN D'AN DIGOR:

Dond a reom d'hoh aspedi, Aotrou,
war bedennou ar Zent A. hag A.
Lakit da vleunia ennom ho tenezonou
ha grit deom ren or buez er peoh.
Dre or Zalver Jezuz Kris', ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
a oll viskoaz da wirviken. AMEN

WAR AR PROVOU:

Taolit eur zell, Aotrou, war ar provou laket war hoh aoter
en enor d'ar zent A. hag A.
Evel m'ho-peus dre ar misteriou santel-mañ
roet dezo gloar an neñv,
roit deom ivez ganf largetez ho pardon
Dre Jezuz Krist , or Zalver. AMEN

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Maze 24/ 46-47)

Eürus ar zervicher
an hini a vo kavet war e labour pa zistroy ar mestr;
e-gwirionez, eme an Aotrou,
fizioud a ray ennañ e oll vadou.

pe: (Luk 12/42)

Setu amañ ar merour feal ha fur,
a vo laket gand e vestr e penn e zervicherien,
evid rei, da beb-hini, d'ar houlz, e lod gwiniz.

GOUDE AR GOMUNION:

Doue oll-halloudeg, dre ar gomunion-mañ ouz taol an neñv,
plijet ganeoh startaad an nerz-kalon e zeu euz an neñv
hag e lakaad da greski ennom
hag e kemend hini a ra gouel ar zent A. hag A.
Or sikourit da vired digemmesk an donezon euz ar feiz
ha da gerzed war o roudou war hent ar zilvidigez.

21- " DICIT DOMINUS"En enor da ziazezourien Ilizou.KAN D'AN DIGOR: (Iz 59/21; 56/7)

Lavared a ra an Aotrou:
 Va homzou hag am-eus laket war da vuzellou
 a jomo warno bepred.
 ha da brovou a vo digemeret mad war an Aoter;

PEDENN D'AN DIGOR:

Doue oll-halloudeg ha trugarezuz,
 teurvezet eo bet ganeoh, dre geennadurez sant A.
 digas sklerijenn an Aviel d'ontadou;
 Ni hag a zo fouge ennom gand an ano a gristen,
 grit deom, ni ho ped, diskleria dreor buez
 ar feiz a zo en or halon.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue vao ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN.

pe: Taolit eur zell, Aotrou Doue, war ho servicherien
 e-neus Sant A. (eskob) ganet d'ar feiz dre e gomz a wirionez
 ha maget gand ar zakramant a ro buez;
 A re e-neus greet anezo, dre e labour, tud a feiz,
 ra zeuy ho kras gand sikour e bedennou,
 da ober anezo tud birvidig a garantez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist...

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, selaouit gand madelez ouz or pedenn:
 Grit ma teuio sakrifisou ho pohl,
 a ginnigom deoh da gêver gouel sant A.
 da drei evidom e madou euz an neñv.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Mark 10/45)

Mab an Den n'eo ket deuet evid beza servichet,
 med evid servicha ha rei e vuez da brena an oll tud.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue, o lida gand joa gouel Sant A.
 on-eus resevet an arrez euz ar zilvidigez peurbaduz;
 Ra vo ar gomunion-mañ evidom eur skoazell
 evid ar vuez a vremañ koulz hag evid ar vuez da zond.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

22- "ISTI SUNT VERI SANTI"

En enor da ziazezourien Ilizou.

KAN D'AN DIGOR:

Are-mañ eo ar zent e-neus an Aotrou dibabet
gand eur garantez wirion
evid lakaad ar wirionez en e Iliz;
A roet e-neus dezo eur hloar hag a bado da viken.

PEDENN D'AN DIGOR:

Taolit ho sell; Aotrou, war hoh Iliz a A.
Dre an aketuz m'eo bet ar zent A. hag A. da astenn ho Rouantelez,
ho-peus hadet enni ar feiz;
Roit dezi ivez ar hras, dre zikour o fedennou,
da jom atao stard e karantez an Aotrou Krist,
Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN.

pe: Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus galvet on tadou
da sklerijenn an Aviel dre brezegerezh (an Eskob) Sant A.
Grit deom, gand zikour e bedennou,
mond atao war zantellaad
hag anaoud gwelloc'h ho Mab, Jezuz Krist, on Aotrou,
Eñ hag a zo Doue.....

WAR AR PROVOU:

Roit digemer, ni ho ped, Aotrou,
d'ar brovadenn a laka dirazoh ho pobl,
en enor d'ar zent A. hag A.
Hag evid ma vo or zakrifis da blijoud deoh,
lakit da greski or harantez en ho keñver.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: ((Yann 15/15))

N'eo ket an ano a zervicher a roan deoh hiviziken,
rag ar zervicher n'oar ket petra 'ra e vestr;
Bremañ e roan deoh an ano a vignon
rag kement am-eus klevet gand va Zad
am-eus roet deoh da anaoud.

GOUDE AR GOMUNION:

Ni a fell deom ho trugarekaad, Doue oll-halloudeg
o soñjal en amzeriou kenta ar feiz en on touez;
deoh eo e kanom meuleudi o lida gouel diazezourien on Iliz;
Ar zakramant a zilvidigez resevet ouz hoh aoter
ra zeuio da garga or halonou euz ho levenez
da geñver deiz o gouel.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

23- "ISTI SUNT VIRI SANCTI"

En enor d'eur misioner.

KAN D'AN DIGOR:

Ar re-mañ eo ar zent a zo deuet da veza mignoned da Zoue:
o gloar eo bet embann ar wirionez a-berz Doue.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi ho-peus laket ar poblou payan
da dremen euz an deñvalijenn da sklerijenn ar wirionez
dre labour (an eskob) sant A.
Roit deom ar hras dre sikour e bedennou
da jom stard er feiz
ha da lakaad on esperañs en Aviel e-neus prezeget.
Dre or Zalver Jezuz Krist....

pe:

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
C'hwi hag ho-peus gouestlet levenez an dervez-mañ
da enori Sant A.
Erit deom poanio da vired bepred
ar feiz e-neus prezeget dibaouez gand eur galon entanet,
Dre or Zalver Jezuz Krist,

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue oll-halloudeg
Taolit ho sell war ar zakrifis a ginnigom deoh
gand Gouel Sant A.
Ha roit deom ar hras da lakaad en or buez
misteriou pasion or Zalver a liñom hirio.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION:(Ez 14/15)

Setu amañ komz Doue:
Me eo a gaso va deñved da beuri
ha me eo a raio dezo diskuiza.

GOUDE AR GOMUNION:

Dre hras ar mister-mañ, Aotrou Doue,
grit d'ho servicherien chom atao stard er feiz
Ma tiskleriint anezi e peb leh
dre o homzou hag o oberou, diwar skouer Sant A.
a ouestlas e vuez penn-da-benn da brezeg ar feiz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

24-"QUEL PULCHRA"En enor d'eur misioner.KAN D'AN DIGOR: (Iz 52/7)

Pegen kaer eo gweled o redeg war ar menezioù
 ar hannad a zigas gantañ kelou ar peoh
 paotr ar helou mad a embann kelou ar zilvidigez.

PEDENN D'AN DIGOR:

Plijet eo ganeoh, Aotrou, e teufe labourioù abostolel Sant A.
 hag e aked d'ho servicha,
 da lakaad hoh Iliz da greski
 Roit dezi, dre zikour e bedennou
 eur feiz hag eur garantez war gresk bepred,
 Dre or Zalver Jezuz Krist...-

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, selaouit or pedennou gand madelez
 ha grit deom beza dieubet a bep pehed;
 Ma hellim beza gwalhet dre nerz ho kras
 er misterioù-mañ a lidom evid ho kloar.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION : (Yann 15/4-5)

Lavared a ra an Aotrou:
 "Chomit ennon ha me ennoh;
 an neb a jom ennon hag e joman-me ennañ
 hennez a zoug fruez eleiz."

GOUDE AR GOMUNION:

Dre ar gomunion-mañ, Aotrou Doue,
 dalhit beo ennom ar gwir feiz,
 on-eus resevel dre brezeg an Ebestel
 hag e-neus Sant A. miret gand aked.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

25-^o ANNUNTIATE INTER GENTES

En enor da misionerien.

KAN D'AN DIGOR: (Salm 95/ 3-4)

Grit brud d'e hloar e-touez broadou an douar,
d'an oll boblou displegit e verzudou
rag braz eo an Aotrou ha braz eo e hloar.

PEDENN D'AN DIGOR:

Douget gand ho madelez dilavaruz, Aotrou,
o-deus ar Zent A. hag A. embannet d'o breudeur
pinvidigez divuzul an Aotrou Krist
Roit deom, dre zikour o fedennou, araoud ahanoh gwelloh
dougen, frouez dre or buez a-bez
ha kerzed dirazoh, atao feal, ouz sklerijenn an Aviel.
Dre or Zalver Jezuz Krist.....

pe: (evid merzerien)

Aotrou Doue oll-halloudeg
deuit d'or zikour da gemer skouer diwar ar zent A. hag A.
Prezeg ar feiz eo bet o c'hoant
hag o-deus evel-se gounezet kurunenn ar verzerien.
Dre or Zalver Jezuz Krist.....

WAR AR PROVOU:

O lida gouel Sant A. e teuom d'ho pedi, Aotrou,
da venniga ar provou a lakom dirazoh;
Erit d'ar re oll a gemero perz enno
beza diwallet diouz peb pehed
ha reseo gand largentez ho sikour
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Luk 10/1, 9)

An Aotrou a gas e ziskibien da embann dre ar hêriou:
Erruet eo betek ennoh Rouantelez Doue.

GOUDE AR GOMUNION:

Ra zeuio ar gomunion-mañ, Aotrou Doue,
d'hor hennerza.
Ha peogwir e lidom gand joa Gouel Sant A.
grit deom kaoud eveldañ an nerz-kalon da veza ebestel.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

23-"ISTI SUNT VIRI SANCTI"

En enor d'eur misioner.

KAN D'AN DIGOR:

Ar re-mañ eo ar zent a zo deuet da veza
mignoned da Zoue.
Kanom meuleudi Sant A.
E hloar eo bet embannet ar wirionez deuet a-berz DOUE.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, C'hwi ho-peus lakeet ar poblou payan
da dremen euz an deñvalijenn da sklerijenn ar wirionez,
dre labour(an eskob)Sant A.
Roit deom ar hras, dre zikout e bedennou
da jom stard er feiz.
ha mad da lakaad bepred on esperañs
en Aviel e-neus prezeget.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN

pe: Doue oll halloudeg ha peurbadel
c'hwi hag ho-peus gouestlet an devez-mañ
da enori Sant A.
Grit deom poania da viroud bepred
ar feiz e-neus prezeget heb paouez gand eur galon entanet
ha da ren diouti or buez.
Dre or Zalver Jezuz Krist...

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue oll halloudeg
Taolit ho sell war ar zakrifis a ginnigom deoh
gand gouel SANT A.
Ea roit deom ar hras da lakaad en or buez
misteriou pasion or Zalver a lidom hirio
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Ez 14/15)

Setu amañ Komz Doue:
me a gaso va deñved da beuri
ha me a raio dezo diskuiza.

GOUDE AR GOMUNION:

Dre hras ar mister-mañ, Aotrou Doue,
grit d'ho servicherien chom atao stard er feiz;
Ma tisklerint anezi e peb leh dre o homzou hag o oberou
diwar skouer Sant A. a ouestlas e vuez penn-da-benn
da brezeg ar feiz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

24-"QUAM PULCHRI"

En enor d'eur misioner (II)

KAN D'AN BIGOR: (Iz 52/7)

Pegen kaer eo gweled o redeg war ar menezioù
ar hannad a zigas gantañ kelou ar peoh;
paotr ar helou mad a embann kelou ar zilvidigez.

PEDENN D'AN DIGOR:

Plijet ganeoh, Aotrou
e teufe labourioù ar misioner Sant A.
hag e aked d'ho serviñ, da lakaad hoh iliz da greski.
Roit dezi, dre zikour e bedennou
eur feiz hag eur zantelez war gresk bepred,
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. Amen.

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, selaouit gand madelez or pedennou,
ha grit deom beza dieub a beb pehed;
Ma hellim beza gwalhet, dre nerz ho kras
er misterioù-mañ a lidoù evid ho kloar.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Yann 15/4-6)

Lavared a ra an Aotrou
Chomit ennon ha me ennoh.
An hini a jom ennon hag a joman-me ennañ
hennez a zoug frouez e-leiz.

GOUDE AR GOMUNION:

Dre ar gomunion-mañ, Aotrou Doue,
dalhit beo ennon ar gwir feiz
on-eus resevet dre brezeg an Ebestel
hag e-neus Sant A. miret gand aked
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

25-"ANNUNTIATE INTER GENTES"

En enor da visionerien.

KAN D'AN DIGOR: (Salm 95/3-4)

Grit brud d'e hloar e-touez broadou an douar
d'an oll boblou displegit e vurzudou
rag braz eo an Aotrou ha braz eo e hloar.

PEDENN D'AN DIGOR:

Douget gand ho madelez dilavaruz, Aotrou,
o-deus ar Zent A. hag A. embannet d'o breudeur
pinvidigez divuzul an Aotrou Krist.
Roit deom, dre zikour o fedennou
anaoud ahanoh gwelloh
dougen frouez a-hed or buez penn da benn.
ha kerzed dirazoh, atao feal da sklerijenn an Aviel
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
a oll viskoaz da virviken. Amen.

pe: (evid merzerien)

Aotrou Doue, oll halloudeg
deuit d'or zikour da gemer skouer war ar Zant A.
Prezeg ar feiz eo bet e hoant,
hag e-neus evel-se gounezet kurunenn ar verzerenti
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN.

WAR AR PROVOU;

En eur lida gouel Sant A.
e teuom d'ho pedi, Aotrou,
da venniga an donezonou a lakom dirazoh
Roit d'ar re oll a gemero perz enno
beza diwallet diouz peb pehed
ha reseo gand largentez ho sikour.
Dre Jezuz Krist, or zalver. Amen.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION (Luk 10/ 1-9)

An Aotrou a gas e ziskibien da embann dre ar hêriou:
Erruet eo beteg ennoh Rouantelez Doue.

GOUDE AR GOMUNION:

Ra zeuy ar gomunion-mañ, Aotrou, d'or hennerza;
Ha peogwir e lidom gand joa gouel Sant A.
Grit deom kaoud eveldañ nerz-kalon da veza ebestel.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

III- RUMMAD DOKTORED AN ILIZ26-"IN MEDIO ECCLESIAE"

En enor da doktored an Iliz (I)

KAN D'AN DIGOR: (Sir.15/5)

An Aotrou Doue e-neus roet da Zant A. komz en Iliz,
Karget e-neus e spered a skiant hag a furnez,
Gwisket e-neus anezañ a hloar.

pe:(Salm 36/30-31)

Muzelloù an den just a zêu ganto furnez
hag e deod a ziskleir ar varnedigez;
Lezenn e Zoue a zo en e galon
N'e-neus aon ebed da gaoud da fazia.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.
rouet ho-peus Sant A.(eskob) da zektor d'hoh Iliz;
Grit ma vo gwriziennet don en hor halonou
ar pezh e-neus kelennet, sklerijennet gand ar Spered Santel;
Ha peogwir ho-peus, en ho madelez, roet anezañ deom da Batron,
grit ma vo ivez on divennour dirag ho trugarez.
Dre or Zalver Jezuz Krist....

WAR ARPROVOU:

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
digemer ar zakrifis a lakom dirazoh a-greiz kalon
gand gouel Sant A.
Doujuz d'e gelennadurez, ni a fell deom
en em ginnig deoh a-bez o lida an overenn-mañ
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Luk 12/42)

Hemañ eo ar merour feal ha fur
a vo laket gand e vestr e penn e zervicherien
evid rei da beb hini, d'ar houlz, e lod gwiniz.

GOUDE AR GOMUNION:

Ar re a gennerzit, Aotrou, gand ar bara beo
Deuit d'o diorren gand kelennadurez an Aotrou Krist
ma teuint, dre zikour Sant A. da anaoud ha kwirionez
ha ma lakint anezi en o buez, poulzet gand ar garantez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

27-"QUI DOCTI FUERUNT"En enor da doktored an Iliz (II)KAN D'AN DIGOR(Dan.12/3)

Ar re o-do bet furnez a lugerno evel splander an oabl,
hag ar re o-do desket hent ar mad d'an dud all
a skedo evel ar stered da virviken.

pæ:(Sir/ 44/15-14)

Anoiou ar Zent a jom beo da viken
Ar poblou a ra kont euz o furnez
hag an Iliz a embann o meuleudi.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus roet da Zant A.
mond don en anaoudegez euz skianchou an neñv
Roit deom ar hras, gand sikour e bedennoù,
da vired en he haer an heveleb kalennadurez
ha da lakaad or buez da gorda ganti gwelloc'h bepred.
Dre or Zalver Jezuz Krist,

WAR AR PROVOU:

Ra zeuy ho Spered Santel, Aotrou Doue,
da rei deom en overenn-mañ emañ o lida
sklerijenn ar feiz a sklerijenne Sant A.
pa boanie da lakaad anaoud ho kloar.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

Antivonenn d'ar GOMUNION:(I Kor. 1/23-24)

Ni a brezeg eur Zalver staget ouz ar groaz
An Aotrou Krist, galloud Doue ha furnez Doue.

GOUDE AR GOMUNION:

Kennerzet gand ar bara euz an neñv,
e teuom d'ho pedi gand eur galon izel, Aotrou,
Grit ma kendalhim bepred, o heulia kenteliou Sant A.
da renta bennoz deoh evid ar grasou en-eus resevet
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

IV-RUMMAD AR GWERHEZED.28-"HIC EST VIRGO SAPIENS"(En enor d'ar gwerhezed I)KAN D'AN DIGOR:

Karget a furnez hag a skiant
 he-deus Santez A. dalhet he lamp war-elum
 evid mond en arbenn d'an Aotrou Krist.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, or Zalver, selaout ouz or pedennou
 Evel ma'z eus joa ganeom o lida gouel Santez A.
 Grit ma vim kenteliel gand ar skouer euz he buez.
 Dre or Zalver K Jezuz Krist...

WAR AR PROVOU:

Oh embann an traou kaer ho-peus greet
 e Santez A. gwerhez,
 e teuom d'ho pedi gand eur galon izel.
 Evel m'eo plijet deoh he buez renet hervez an Aviel,
 grit digemer vad d'an enor a rentom deoh
 dre an overenn-mañ
 Dre Jezuz Krist, or Zalver....

ANTIVONENN D'AR GOMUNION(Maze 25/6)

Setu ar Pried o tond;
 It en arbenn d'an Aotrou Krist.

GOUDE AR GOMUNION:

Dre ar bevañs euz an neñv ho-peus roet deom, Aotrou,
 on-eus renevezet on nerz,
 Dond a reom c'hoaz d'ho pedi
 Pa zougom en or horv pasion Jezuz
 war skouer Santez A.
 Grit ma ne glaskim beva nemed evidoh
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

RUMMAD AR BASTORED.

AL LENNADENNOU...

A-LENNADENN GENTA(er mêz euz an amzer fask.)

I-Ex 32/ 7-14

Pobl Israel, saveteet gand Doue euz sklaverez Bro Ejipt,
a dro kein d'e vadoberour, oh azeuli doueou faoz.
Pedenn Moizez a dorro kounnar an Aotrou Doue.

LENNADENN EUZ LEVR AN Exod: (Gweled levr C.p.88)

Salm...105:19-20,21,22,23.(pelloh)

II-Adlezenn. 10/ 8-9:

On herez hag on lod eo Doue.

Lennadenn euz levr an Adlezenn:

8-Neuze e tispartias Doue rummad Levi
evid dougen an arh euz an Engleo
greet gand an Aotrou,
evid chom dirag an Aotrou,
da ober al lidou ha da venniga en e ano,
evel m'e-neus greet beteg-henn.

9-Setu perag n'e-neus rummad Levi
nag herez na lod gand e vreudeur;
an Aotrou e-unan eo e herez
evel m'e-neus prometet dezañ
an Aotrou ho Toue.

SALM...15/1-2a ha 5,7-8,11a...(pelloh)

III- I Samuel.16/4b,6-7,10-13:

David a zo sakret da Roue gand Samuel.

LENNADENN EUZ LEVR KENTIA SAMUEL:

(Gweled levr A. p.24 ha 25)

SALM 88...(pelloh)

IV- IZAIAS 6/1-8:

Galvet gand Doue da brezeg en e ano,
an den en em gav dister, med lavared a ra: ya !

LENNADENN EUR LEVR AR PROFED IZAIAS: (Gweled p.52 levr C)

SALM...39 (pelloh)

V-IZAIAZ...52/7-10 (en enor d'eur misioner)

An Aviel a zo kelou mad a-berz Doue,
evid oll boblou ar bed.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAZ

(Gweled levr T p.125)

SALM....95(pelloh)VI-IZAIAZ...61/1-3a, 6a,8b-9

An Aotrou e-neus va zakret gand an oleo,
kaset e-neus ahanon da brezeg ar helou mad d'ar re baour.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAZ:

- 1-Spered an Aotrou a zo warnon
rag m'e-neus an Aotrou va zakret gand an oleo;
Kaset e-neus ahanon da rei da anaoud
ar helou mad d'ar re baour
da frealzi an dud doaniet,
da rei da houzoud d'ar brizonidi ez int libr
ha d'ar re zall e teuo dezo ar gweled.
- 2-Da embann eur bloavez a yadeleziou a-berz an Aotrou
hag eun devez a venjañs evid Doue
Neuze ar re oll a vo o leñva, me o iñealzo
- 3-E-leh ludu ar binijenn
e lakin war o fenn eur gurunenn a roue;
e kañv edont hag e lakin war o fenn
eoul c'houez vad, mammenn a joa,
kollet o-doa peb fiziañs
hag e roin dezo dillad-gouel.
- 6-Ha c'hwi a vo anvet "beleien an Aotrou"
roet e vo deoh an ano a "zervicherien on Doue"
- 8-Rei a rin deoh an digoll prometet
hag ober a rin ganeoh
eun emgleo peurbaduz.
- 9-Ho tud war ho lerh a vo brudet e-touez ar broadou,
ha tud ho lignez da zond e-touez ar poblou
kement hini o gwelo, a welo enno,
eul lignez benniget gand Doue.

SALM 88 (pelloh)VII-JEREMIAZ 1/4-9:

Ar Profed Jeremiaz a zo dibabet gand Doue.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ. (Gweled levr T p.87)SALM...95 (pelloh)

VIII-EZEKIEL 3/16-21:

Doue a lavar:" d'ar profed Ezekiel:
 "ober a ran ahanout eur gedour evid ti Israel."

Lennadenn euz levr ar profed Ezekiel:

16-An Aotrou a gomzas din evelhenn:
 "Mab den, ober a ran ahanout eur gedour evid ti Israel.

17-Pa glevi eur gomz diwar va muzellou,
 e roi anezi da anaoud euz va ferz.

18-Ma lavaran d'an den fallakr:
 "Emaout o vond da vervel"
 ha ma ne lavarez ket dezañ taoler evez,
 ha trei krain d'e vuez fall, evid ma vevo,
 eñ, an den fallakr, a varvo euz a behed,
 med diganit-te eo e houlennin kont euz e wad.

19-Er hontrol, ma lavarez d'an den fallakr taoler evez,
 ha ma ne dro ket kein d'e fallagriez ha d'e vuez fall,
 eñ a varvo euz e behed,
 med te az-po saveteet da vuez.

20-Ma teu d'an den just trei diwar ar justis
 hag ober an droug
 me a stigno lascu dirazañ hag e varvo
 ablamour ma n'az-peus ket lavaret netra dezañ
 e varvo euz a behed,
 ha ne jomo mui ano euz ar just m'eo bet
 Med diganit-te e houlennin kont euz e wad.

21-Er hontrol, ma lavarez d'an den just ne dle mui pehi,
 ha ma ne beh ket,
 e vevo ablamour m'eo bet kemennet dezañ,
 ha te az-po saveteet da vuez.

SALM...116/1-2 (Gweled pelloh)

IX-EZEKIEL...34/11-16

Doue a gaso e zeñved da veuri, hag a raio dezo diskuiza.

Lennadenn euz levr ar Profed Ezekiel.

(Gweled levr C p.44)

SALM....(pelloh)

B-LENNADENN GENTA (E-pad an amzer Fask.)I- OBEROU 13/46-49: (En enor d'eur misioner)

SANT Paol a zo bet embanner braz ar feiz
 en amzeriou kenta an Iliz.
 Pæzegeg e-neus ar helou mad d'ar bayaned,
 eleh chom wardro ar Yuzevuen hebken.

Lennadenn euz levr Oberou an Ebestel:

46-En deiziou-se, Paol ha Barnabaz a lavaras d'ar Yuzevien
 Deoh-c'hwi da genta e rankem lavared komzou Doue,
 med peogwir ne fell ket deoh o digemer
 ha n'en em gavit ket din euz ar vuez peurbaduz,
 setu e troom-ni war-zu ar bayaned.

47-Rag evelse eo bet gourhemennet deom ... gand an Aotrou:
 "lakeet am-eus ahanout da sklerijenn ar broadou payan,
 da gas ar zilvidigez beteg pennou pella ar bed."

48-O klevet kement-se ar Bayaned a oa laquen braz
 ha meuleudi a roent da gomz an Aotrou Doue,
 ha deuet oa d'ar feiz
 ar re oll a oa merket gand Doue evid ar vuez peurbaduz.

49-Neuze, komz an Aotrou a yeas d'en em skigna
 a dreuz a vro-se a-bez.

SALM 116 (pelloh)II-Oberou 20/17-18a, 29-32, 36

Paol a gimiañ diouz kristenien Iliz Efez:
 Beillit, emezañ dezo, ha chomit stard er feiz.

Lennadenn euz levr Oberou an Ebestel:

17-En deiziou-se, Paol euz kêr Milet
 a halvas davetañ kozidi-meur Iliz Efez.

18-Pa oant erruet e lavaras dezo:

28-"Beillit gand evez warnoh hoh-unan,
 ha war an deñved e-neus ar Spered Santel
 laketa ahanoh da episkoped warno.
 Bezit mesaerien Doue en Iliz-se
 e-neus prenet gand e wad.

29-Her gouzoud a ran, eur wach ma vezin eet kuit
 eh en em zilo en ho touez bleizi kriz
 ha n'o-do damant ebed evid an tropell.

30-Euz ho touez hoh-unan zoken e savo tud
 da skigna kredennou faoz
 ha da zacha an diskibien d'o heul.

31-Bezit war-veill eta
bezit soñj, n'am-eus ket ehanet gand daelou
noz ha deiz, epad tri bloaz
da rei kuzul vad da beb-hini ahanoh.

32-Ha bremañ e fizian ahanoh e Doue
hag en e gomz a hras, galloud dezi da zevel an ti
ha da rei deoh o lod gand an oll zent.

36-Goude ar homzou-se ez eas d'an daoulin
hag e pedas ganto oll.

SALM...109 (pelloh)

III-Oberou...26/19-23:

An Abostol Sant Paol dirag ar Roue Agrippa.

Lennadenn euz levr Oberou an Ebestel:

19-En deizioù-se, Paol kaset dirag ar roue Agrippa
a lavaras dezañ:

"N'eo ket fellet din herzel ouz ar weledigez
bet din euz an neñv;

20-Ar hontrol eo:

Da dud Damaz da genta ha da re Jeruzalem
ha da re Bro-Judea, goudeze d'ar bayaned
em-eus prezeget e oa red dezo cheñch buez,
ha trei ouz Doue, o ren eur vuez a binijenn.

21-An dra-ze a zo kaoz, o-deus ar Yuzevien kroget ennon,
p'edon en templ, ha klasket va laza.

22-Doue e-neus va zikouret beteg-henn

hag e kendalhan da renta testeni
dirag ar re vian hag ar re vraz;
Ar brofeted ha Moizez o-doa diouganet
ar pezh a dlee erruoud;
ha ne lavaran netra muioh.

23-Ar Hrist a dlee gouzañv poan
hag a dlee adsevel ar henta a-douez ar re varo
evid embann ar sklerijenn d'ar bobl ha d'ar broadou payan.

SALM 116 (pelloh)

EIL LENNADENN:I-ROM. 12/3-13=

Peb-hini e-neus resevet digand Doue donezonou dezañ e-unan;
hag oll asamblez, peb hini hervez e zoare
e labourom evid gloer Doue.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'Ar Romaned:

3-Va breudeur, dre ar hras a zo bet roet din
e lavaran d'an eil ha d'egile ahanoh:
na vezit ket furroh eged n'eo dleet beza,
med awalh evid chom er furnez,
peb-hini hervez e lod a feiz e-neus bet digand Doue.

4-N'on-eus nemed eur horv hebken,
ha koulskoude meur a ezel
hag an izili-se n'o-deus ket
an heveleb karg pebhini anezo.

5-Evelse, ni ivez, daoust ma'z eus ahanom meur a hini,
n'eus ahanom nemed eur horv hebken er Hrist,
o veza ma'z om, peb hini hervez e lod,
izili an eil d'egile.

6-Hag on-eus donezonou disheñvel
hervez ar hras bet roet deom;
mar deo an donezon da brofetiza
greom ganti hervez ar feiz,

7-an donezon da zervicha, servichom,
da guzulia, kuzuliom,

8-d'an neb a ro, rei kaloneg,
d'an neb e-neus da ren, hen ober gand aked,
d'an neb en em ro d'an oberou a drugarez,
hen ober laouen.

9-Ra vo gwirion ho karantez,
tehit diouz an droug gand euz,
hag en em stagit ouz ar mad.

10-Evel, m'en em gar breudeur,
ho-pet an eil ouz egile eur garantez tener
peb hini e lakaad ar re all uhellon egetañ.

11-Bezit leun a breder, heb diegi,
e karantez birvidig ar Spered, e servij an Aotrou.

12-Gand ^{al}levenez a ro esperañs,
mad da houzañv en drubuill, aketuz da bedi.

13-O vond war zikour ho preudeur kristen en o ezommou,
prest dalhmad da rei digemer en ho ti.

SALM (pelloh)

II- I.Kor. 1.18-25:

Kenteliou ar groaz a zo follentez evid lod tud,
evid lod all ez int furnez.

Lennadenn euz lizer kenta Sant Paol da Gristenien Korint:

18-Ma breudeur, kenteliou ar groaz a zo follentez
evid ar re a ya da goll;
med evid ar re a zo war hent ar zilvidigez, evidom-ni
ez int galloud Doue.

19-Rag skrivet eo;
da netra e kasin furnez ar re fur
da netra e kasin spereb an dud sperebeg.

20-E peleh ema an den fur ?
E peleh ema an den gouizieg ?
E peleh ema treuz-sperejou ar bed-man ?
Daoust ha n'e-neus ket Doue troet e follentez furnez ar bed ?

21-Rag peogwir ne-neus ket gelled ar bed, dre e furnez,
anaoud Doue e oberou furnez Doue,
ez eo plijet gand Doue salvi ar re a gred
dre follentez kemennadurez an Aviel

22-Epad m'ema ar Yuzevien
o houlen merkou euz galloud Doue
hag ar Hresiahed o klask ar furnez,

23-setu e prezegom-ni eur Zalver staget ouz ar Groaz
eur vez evid ar Yuzevien,
ha diskianterez evid ar bayaned;

24-Med evid ar re a glev Doue ouz o gelver
koulz Yuzevien ha Gresianed,
galloud Doue ha furnez Doue eo ar Zalver-se.

25-Rag Doue pa ziskouez beza diskiant
a zo furroh eged an dud,
ha pa ziskouez beza dinerz, a zo kreñvoh eged an dud.

III- I Kor. 4/1-5

An Aotrou a roio da anaoud ar pez a zo kuzet.

Lennadenn euz lizer kenta Sant Paol da gristenien Korint:

Gweled levr A. p. 71

IV- I Kor. 9/16-19,22-23:

Gwaz-a-ze din, eme Sant Paol, ma ne brezegan ket an Aviel.

Lennadenn euz lizer kenta Sant Paol da gristenien Korint:

(Gweled levr B p.54)

V- II Kor. 3/1-6a :

Kanna an Aotrou Doue eo sant Paol,
Gwella kred evitañ er gristenien e-neus gounezet d'ar feiz.

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da gristenien Korint:

(Gweled; levr B. p. 59)

VI- II Kor. 4/1-2; 5-7:

E kreiz an trubuilhou, e chom dineh ar hristen.
Diwar ar boan hag ar maro e tarz ar vuez.

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da gristenien Korint:

(Gweled levr B p. 61)

VII- II Kor. 5/14-20:

Or brasa preder, koulz er vuez, koulz er maro,
eo plijoud da Zoue.

Lennadenn eur eil lizer Sant Paol da gristenien Korint:

14-Va breudeur, karantez Or Zalver ne lez diskuiz ebed ganeom,
pa zoñjom en dra-mañ: ma'z eo bet marvet unan evid an oll,
an oll eta a zo tremenet dre ar maro;

15-hag ouzpenn-ze, marvet eo ar Zalver evid an oll,
evid ma teuo ar re'zo beo da veva, n'eo ket evito o-unan,
med evid an hini 'zo bet evito maro hag adsavet da veo.

16-Evelse, ni diwar vremañ, n'on-eus mui anaoudegez euz den ebed
hervez doareou ar bed;
ha pa vefe bet anavezet ar Zalver ganeom hervez doareou ar bed,
bremañ avad ne reom ken.

17-An neb a zo en Aotrou Krist, a zo anezañ eun den nevez;
an traou a-wechall a zo eet e-biou, setu deuet eur bed nevez.

18-Kement-se oll a zeu euz Doue an Tad
e-neus on lakeet e peoh gantañ dre an Aotrou Krist,
hag e-neus fiziet ennom ar garg da rei e bardon d'an dad.

19-Rag Doue eo a oa en Aotrou Krist o lakaad ar bed e peoh gantañ:
en eur denna diwar an dud pouez o fehejou,
pa lak war or muzellou-ni komzou ar pardon.

20-A-berz Or Zalver on-eus karg da brezeg,
ha dre or mouez, Doue eo a zeu d'ho kervel.

Hoh aspedi 'reom en ano Or Zalver: grit ho peoh gand Doue.

VIII -Efez...4/ 1-7, 11-13:

Perag e tle ar gristenien chom unanet:
eur Zalver hebken, eur feiz, eur vadiziant.

Lennadenn euz lizer Sant Paol da gristenien Efez:

- 1-Va breudeur, hoh alia stard a ran,
me hag a zo er jadennoù ablamour d'Or Zalver,
da heulia en ho puez an hent a zigouez deoh (pe: a zere ouzoh)
goude m'oh bet galvet d'ar feiz gant Doue.
- 2-Bezit ataol izel a galon, leun a zouster hag a basianted,
en em houzanvit an eil agile gant karantez.
- 3-Lakit ho poan da vired an unvaniez, frouez ar Spered,
pa'z euz etrezoh liamm ar peoh.
- 4-Eur horv hag eur Spered hebken a zo,
kenkouls ha m'oh bet galvet d'eun esperañs hebken.
- 5-N'eus nemed eun Aotrou Krist, eur feiz, eur vadiziant.
- 6-eun Doue, Tad an oll, hag a zo dreist an oll,
e-touez an oll, hag e-diabarz an oll.
- 7-Koulskoude, pebhini ahanom a reseo e lod a htas Doue
hervez m'e-neus ar Hrist paezet e zonezonou.
- 11-En e ivez e-neus "ræet" da lod tud beza avielerien,
pe pastored ha doktored.
- 12-Evelse e vo urziet mad pobl Doue
evid labour ar ministerezh,
ma vo savet korv ar Hrist.
- 13-En termen euz al labour-se,
e tleom digouezoud, oll asamblez,
da veza netra nemed unan er feiz,
hag en anaoudegez gwirion euz mab Doue,
ha dond da veza an den parfed,
beteg tizoud d'ar vent parfed m'eo ar Hrist e-unan.

IX- Kolos...1/24-29

Pebhini ahanom e-neus e lod da gemer
e poaniou or Zalver, evid silvidigez ar bed.

Lennadenn euz lizer Sant Paol da gristenien Kolos:

(Gweled levr C p. 75)

X-ITess. 2/2b-8:

Ni a garfe rei deoh, n'eo ket hebken an Aotrou Krist,
med kement a zo ahanom.

Lenadenn euz lizer kenta Sant Paol da gristenien Tessalonik.

2-Va breudeur, c'hwi a oar penaoz ez om deuet en ho touez
n'eo ket en aner.

Gouzañvet on-eus, er gouzoud a rit
-poaniou ha dismegañsou e kêr Filip.
Med Doue e-neus roet deom ar hras
da brezeg gand fizians dirazoh an Aviel
e-kreiz eur stourmad garo.

3-Ouz ho kelen, n'om ket bet renet
na gand kredennou faoz na gand youlou fall
ha ne glaskom ket ho touella.

4-Med, o veza m'e-neus Doue fiziet ennom an Aviel,
goude beza amprouet ahanom,
e kelenom, kenta'ze, o klask plijoud
n'eo ket d'an dud, med da Zoue
a bouez menozioù or halonou.

5-Gwech ebed kennebeud, her gouzoud a rit
n'eus bet ganeom, na komzou tostennuz
na c'hmant kuzet da hounid arhant.
Doue a zo test a gement-se.

6-N'on-eus ket muioh klasket enorioù ar bed.
nag en ho touez, nag el leh all.

7-Ha koulskoude, Ebestel ar Hrist ahanom
on-efe gellet poueza warnoh
Ar hontrol eo, leun a zouster ez om bet ganeoh
evel eur vamm o vagahe bugaligou,
hag oh intent outo gand karantez.

8-Gand eur seurt karantez evidoh,
ni a garfe rei deoh
n'eo ket hebken an Aotrou Krist,
med kement a zo ahanom
ken tomm maz'om deuet da veza ouzoh.

XI- II Tim. 1/13-14. 2/1-3:

En desped d'an enebiez a gav endro dezañ
diskibl Jezuz a dle kerzet dalhmad war roudou or Zalver.

Lenadenn euz eil lizer Sant Paol da Dimote:

1/13-Va mab karet, renk da furnez
war ar gelennadurez yah am-eus roet dit er feiz
hag er garantez on-eus e Jezuz Krist.

14-Ar gelennadurez-se a zo bet fiziet ennout,
mir anezi gand sikour ar Spered Santel
a zo o chom ennom.

2/1-Kemer nerz er hras a zo er Hrist Jezuz

2-Ar gelennadurez az-peus bet diganin dirag testou niveruz,
henn ro da anaoud da dud a fiziañs
gouest d'o zro da gelenn re all.

3-Kemer da lod a boaniou
evel eur gwir zoudard d'ar Hrist Jezuz.

XII- II Tim. 4/ 1-5:

Da brezeger an Aviel, beza war evez;
taoler evez ouz ar falz-doktored.

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da Dimote:

1-Va mab karet, da aspedi a ran dirag Doue ha dirag ar Hrist Jezuz,
efi hag a dle barn ar re veo hag ar re varo,
en ano an deiz m'en-em ziskouezo ha ma reno.

2-Embann ar Gomz, pouez warni
ha pa ve ar mare, ha pa ne ve ket,
dizlavar, gourdrouz, poagn da alia
gand kalz a basianted divrall
ha gand ar youl da gentelia.

3-Rag eur poent a zeuio, ha ne houzañvo mui an dud
ar gelennadurez gwirion.
med hervez o youlou hag hervez ar pezh a blij dezo kleved
e klaskint d'o helenn doktored eleiz.

4-Stouva 'raint o diskouarn ouz ar wirionez,
evid trei warzu sorhennou.

5-Evidout-te, bez evezieg e peb doare,
gouzañv an drubuill
gra da labour a brezeger an Aviel,
kas da benn da garg.

XIII- I Pêr...5/ 1-4:

D'ar gozidi-meur, beza evezieg, embann ar wirionez
dre o homzou ha dre skouer o buez.

Lennadenn euz lizer kenta Sant Pêr:

1-Ar gozidi-meur a zo en o touez, o'fedi a ran,
ma hag a zo e renk ar Gozidi evel do,
ha test euz poaniou ar Hrist,
me hag a dle ivez kaoud lod er hloar
a zo daveza diskuillet.

2-Evesait ouz deñved Doue fiziet ennoh,
o veilla warno, n'eo ket dre heg, med dre gaer,
evel ma fell da Zoue.

3-N'eo ket gand ar hoant da hounid,
ar pezh a vefe eur vez,
med gand lans ho kalon,

N'eo ket oh ober an aotronez
war ar re a zo en ho karg
med o veza skoueriou evid an deñved.

4-Ha p'en em ziskouezo mestr braz ar bastored
e resevoh ar gurunenn a hloar,
an hini ne zeu ket da oevri.